

Rummen 20. — Bloavez 2

Miz Here 1905.

AR VRO

KELAOUENGELC'H

MIZIEK

KROUET EVIT BEZA

EUN ^{ERE} ETRÉ

AR VRETONED



*Sebe an heol aour o sevel
Keg o tinnill war Breiz-Izol...
Caldiz*



Priz eur Rummen :

5 GWENNEK

KOUMANANCHOU :

Breiz ha Bro-C'hall : 14 real

Breiz-Veur ha lec'hiou-all : 20 real

En Gwerz en holl Stalloù Leoriou gwir vreton

KRENNAD :

Kendalc'h
Kastell-Paol
Stad ar Brezounek
EYNIK ARVOR
Efflam Kerzenan
HENORET
Douar Santel
LOIZ AR ROZ
Ar Biniou
POTR AR C'HAP

AR VRO

Penn-Rener :

FANCH JAFFRENOU " TALDIR "

« Kaz an den ha na gar ar Vro a vag anezan »

Tennet deuz Allou mad Sant KADO
(*Myeirian Archeology*, levr. III., d. 40, rimel, 3.)

KRENNAD :

Nijet... AR YEODET
An daou varz AR PACH
Tina!!! ROUHLANN
Dihun Breiz AR GARREK
Eun neubeut komzou CARDINAL
Jelvestrik, tragedien AN ARCHANTER
Leorlennadur

Kendalc'h Kastell-Paol

Evid tremenn heb ober implij doulb gant *Ar Bobl*, *Ar Vro* na reio ket eun histor penn da benn deuz ar goueliou kaer kenan a zo bet er gear a Gastell euz an 9 d'ar 14 a viz Gwengolo 1905.

Awalc'h eo d'ez lavaret eo bet ar goueliou-ze eun treac'h meurbed dispar evid hon Mam-Vro hag hor Brezounek. Ar *Ganiri* dindan Koc'hi Kastell, displegadur *Ar gwir treac'h d'ar gaou*, gant Aktourien Montroulez, *Soniri* paotred an abad Bosson, ar *Seansou Labour*, ar *Peziou-teatr* c'hoariet en porz Kastell Keriann, (devez diakouaüs!) ar *Gorsedd digor*, lidet var gern reier enez Perharidi, kichen Rosko, an traou-ze holl a zo bet great da c'hloar Breiz-Izel, hag o deuz servijet da ziskuez pe-sort bro gaer a c'hallje houma dond da veza, ma kar-jemp en em glevet holl atao evid "sevel hon fobl tud var ar bajen uhella."

KEVREDIGEZ BROADUS BREIZ

Stad ar Brezounek

ER BLOAZ 1904-1905

Reulet-kont lennet e Kastell-Paol

Kenvroiz ker, nan euz ket pell, an "Dugay-Trouin," eul lestr braz a Vro-C'hall, a harpaz e porz-mor Dakar, du-ze e bro an Afrik. Choum a reaz eno diou sizun, ha bemdeiz, ar Vartoloded a ie war leur ar gear da ober an exersisou. Epad eun diskwiz, eur misioner breizad a dremenaz ha c'hoant d'ezan da c'houzout hag hen a oa eno unan bennag euz he genvroiz, e hopaz en brezounek: « Hé, mignoned, bezan 'zo eur bretoun en ho touez! »

Kant mouez a respontaz: « Holl ec'h omp euz Breiz-Izel! »

— « Neuze, mignoned, lavaraz ar belek, deuit er gwasked, e-kichen an iliz, en disheol ar gwez pere 'zigaso sonj d'eomp ouz gwez dero hor Breiz. Pell 'zo, hep mar, n'hoc'h euz ket klevet prezegen abed en brezounek. Chilaouet, m'ho ped, hag ec'h an da gomz d'eoc'h en iez hor Bro. »

An Tad misioner a reaz neuze ar c'henta prezen vrezounek a zo bet great biskoaz er "Senegal." O klevet iez ho Breiz, kalz a vartoloded a skuille daërou.

Pe sort daërou? Re a c'hlac'har, pe re a lawenedigez? Re a c'hlac'har, marteze, rak ar Vretouned divroet-man o doa moarvat anaoudegez ouz ar brezel didrue a vije great d'ar brezounek ar mare-ze.

Mez ar Breizad a oar penoz he iez 'zo divarvel! An daërou-ze 'oa kentoc'h daërou a lawenedigez o klevet langaj o mam, langaj o c'hearik didrouz, iez ho ferson

koz, d'ar zul en iliz dantelezed. Pell pell deuz ar Vro, ar iez-ze 'oa ken dous, ken tener!

En gwirione, o iez, ar gwellan tenzor o deuz bet digant ho zud koz, a zo karet dreist gand ar gwir Vretouned.

Ar renk a enor, 'touez an hevelep gwir Vretouned, a zo dleet da izili K. B. B.

Hon c'hevredigez a lak he oll nerz da brienti pep tra 'vid mad ar Vro, setu perag zo enhi meur a loden, mez an hini genta, ar brasa dre he frouez, dre he buez eo al loden vrezounek. Labour talvouduz e deuz great 'vit ar bloaz tremenet ha lawen on o tonet aman d'en diskoue.

— *Kenskrivadegou bloaveziek* hon c'hevredigez a ra an tu da galz a Vretouned da zével gwerziou ha seniou e-leiz, ha kalz kaëroc'h an eil 'vit eben. Eur gwalleur eo na wel ket an holl ar skridou dudiuz-ze. Eundra vad vije var ma c'hreden, o moulla 'n eur gelaouen bennag, evel 'barz *Ar Vro*: eur gonid 'vefe 'vit hon c'henvroiz hag eur skouer 'vit ar skrivagnerien da zont. (1)

— Hon mignon mad Erwan Berthou an euz roet d'eomp he levr *Dre an Delen hag ar C'horn-Boud*. Barzoniez Alc'houeder Treger 'zo deuz an dibab. An hano roet d'ean, gand he oberour, a lar petra a gaver ennan: *War an delen*: mouez karantezuz ar mab hag ar barz o kana euz he vro ar c'haërder, an istor dispar, ar varzoniez, kaer d'he galon ha dudiuz d'he ine! *Dre ar c'horn-boud*; ar barz a lesk he hopaden skiltruz a genvroad kalonek d'he vreudeur bretoun, 'vit a virfont doun 'barz 'n ho c'halon karantez, gizioù, kredennou ha iez ho Bro vikan! Lennet an euz ive, gant dudi, eul levr barzoniez all *Mouez reier P'oungastell*, skrivet gant unan euz gwella skrivagnerien Bro-Leon, *Klaoda*, barz Plou-gastel. Gwerziou koant an oberour a ziskue pegen en-tanet eo he galon dre garantez 'vit ar vro, ha penoz he bluen a 'zo gwestlet da Vreiz-Izel hepken! Eul levr all, brao ha fentuz, eo *Gwin Coatascorn*, rimet en brezounek gant Ch. Gwennou.

E Brest, a zo bet moulet daou levr: *Hron Varia Lourd*, skrivet gant an Ao. Madec, belek, ha *Deomp da Jezuz ar sakramant*, levr a zeoliez pe a zevosion euz ar gwellan, e pelini ar wirineou gristen a zo displeget skler dre danevellou ha skoueriou dibabel mad ennan. E Brest, zo c'hoaz an *destamant koz*, a zo bet admoulet 'vit an 9^{ed} gwech, ha *Skoueriou kristen* an Ao. Bourdoulouz, deuet 6.000 anean er meaz euz ar wask, varlene, hag a zo bet admoulet 'vit an eil gwech.

Niveruz int ar peziou-c'hoari a zo bet zavet 'vit ar bloaz tremenet.

1) *Ar gwir treac'h d'ar gaou*, skrivet gant hon mignon Abalor, bet kurunet e Kendalc'h Gourin, ha c'hoariet ken brao aman disul. Oll ec'h oc'h bet test deuz ar blijadur en euz great d'ar Bobl e Kastell-Paol.

2) *Buhe Santez-Barba*, gant an Ao. May.

3) *Jozon er lagouter*, *Arden an Nozeganned* ha *Gou-*

Rummen genta *Ar Vro* a vezo talvoudus kenan. Leuniet a vezo gant ar Skridou bet kurunet en kendalc'h 1905. Ar Goumananterien hag o deuz c'hoant da gaout eun toullad rummennou deuz hounnez a dle digas lizer d'eomp, ha 5 gwennek evid pep rummen en tu all.

ten da *simein* gant gwella skrivagner bro Wened, ar barz Job er Glean.

6) *Job at tounker*, troidigez en iezik Bro-Leon eur pezh c'hoari Ar Bayon.

7) *Dre ar bugel* gant an Ao. Cardaliaguet.

8) *Santez Philomena* skrivet gant Skivit, ha bet c'hoariet en eun doare ken mad gant merc'hed vihan Plesidy.

9) *Fontanella*, moulet ebarz *Courrier du Finistère*.

10) *Maro Sant Tremeur* gant an Ao. Roudot.

11) *Janedik*, ar plac'h *divroet*, gant Jaffrennou.

12) *Nozvez ar gwaligennou* ha 13) *Sant Erwan*, gand Barzik Kerglaz.

14) « *En tri gonsort* », « *Evit Doue hag ar Vro* », bet c'hoariet e Plouhinek gand potred Sant Geneg.

15) *Arzur Breiz*, (o paouez dond er mez euz ar wask) eur pezh deuz ar Brava, n'am euz ket ezom d'ober e Vulodi, hen gweled 'vo pa mo lavaret penoz an oberour eo hon mignon Tousaint ar Garrec.

16) *Barz Plougastel* a zo o voullan e eil levr, eur pezh-c'hoari hag a zoug ive an hano; *Arzur Breiz*.

17) Ebarz *Ar Vro*, an Ao. An Arc'hantek a zo o skriva d'emp, *Ar Chouan Bihan*.

18) An Ao. Perrot an neuz zavet *Alanik al touarn*, ar pezh ze hag hen doa laket an holl da c'hoarzin kement dec'h e kastel Kerian.

Setu aze 18 pezh-c'hoari nevez. Kaer eo kement ze 'neur bloaz! Mez na fell ket d'ar Varzed lezel o fluen da zihan, rak e pep korn euz Breiz e tiwan bemdeiz Stroladori C'hoarierien.

Petra lavarinn deuz al levriou muzik? Ama ive zo eun arokad: tri bez nevez: *Kantikou brezounek* an Ao Guittorel, *Airs et Chants populaires de Basse-Bretagne* gant hon mignon dispar an Ao. Guillermin; *Kanaouennou santel* digant an Ao. Biler ha Ropartz; al levriou-ze zo bet moulet gand *Skola Cantorum St. Jercez Paris*.

Toniou koant ha pobluz a zo bet dastumet, moulet ha skignet touez ar bobl gand *Kloc'hdi Breiz*, *Dihunamb*, *Kroaz ar Vretoned* ha « *la Paroisse bretonne* ».

Ar gelaouen-man goude bea moulet kalz a werziou a bep sort, a zo staget gand eur rummad kanaouenou « *Chansons anecdotiques de Bretagne* » pere a zispleg d'emp kalz a draou brao deuz histor Breiz, histor brudet gand ar bobl diwar ar meaz e-unan. Meulodi d'an Ao. Cadic da vea lakeet al labour talvouduz-ze war ar stern!

Kelaouennou ha *gasetennou* Breiz a dalc'h mui-ouz mui da rei d'emp pennadou brezounek, eur menek a enor a zo dleet d'Ar Vro, d'Ar Bobl, da *Groaz ar Vretoned* ha da *Zihunamb*. Saludomp gant karante an Dihunamp krouet e bro Gwened gand hon mignoned Herriou ha Mellag. Ar gelaouennik-ze a zo stummet deuz ar gwella 'vit plijout hag ober vad d'hon c'henvroiz euz ar Morbihan.

'Vit-hi da vea iaouankik flamm ha zavet gand kement a boan e ve tennet 2000 bep miz: 1000 goumanant a zo, 1000 a ve gwerzet a hent all, 'tousez pere 500 er skolioù 'vit diski lenn brezounek d'ar vugale.

Enor 'ta d'he skrivagnerien ha buez hir d'ezi! Vit an deziou c'hoaz a zigoue ganemp ar *Furcheur bretonn*.

Keuz am euz o amzao penoz ar skolioù brezounek o deuz bet eur falladen 'vit ar bloaz tremenet: nan euz nemed hini Gwengamp hag he deuz dalc'h stard d'he baniel.

Eur menek a zo dleet ive d'an Ao. Tanguy Malmanche a lak e boan hag e amzer da gentelia war ar brezounek, hon c'henvroiz, e Pariz.

Bet hon beuz levriou mad tre, talvoudus d'ar re a fell d'hé diski ervad ar brezounek. *Étymologies bretonnes*, skrivet gand an Ao. Ernault, pehini na baouez ket da bleal gant hon iez; d'ar re a studi hon iez e lavarinn c'hoaz penoz Ernault a labour war eul *Lexique étymologique*, hag an Aotrone Guillevik hag ar Goff war eur *Vocabulaire français-cannetais*.

Kabluz e vefen, kenvroiz ker, mar na gomzfen ket d'ac'h deuz eul labour, pehini, mar na blé ket a zeeün ouz hon brezounek, a zeu da lakaat hen karet mui-ouz-mui gant hon breudeur a Vro-Geumri. Al labour-ze eo ar c'henteliou keumraeg a ro, diou vech ar zun, hon mignon mad ar Barz Abherve, du-ze e Sant-Briek. Daoust

d'al labour an neuz gant e gazeten ha gant e studiou brezounek, an Ao. Vallée a lak e boan da brienti kenteliou dispar war ar c'heumraeg dre ar brezounek. Ra vezo trugarekaet eta hon mignon, rag hen zo kiriek mar be digemeret ken mad, e Bro-Geumri, Leanezed gwen Breiz-Izel. Red eo hen laret, e genteliou keumraeg o deuz bet enebourien, mez gant ioul kaled ar Barz eo deut an trec'h. Enor d'ezan!

Hon brezounek ive a zo bet lakeet er renk a enor e kalz a brezouennou, dreist-holl gant an Aotrone Corfec, Jaffrennou ha Loeiz Herriou. Difennet eo bet ive dre skridou leun a wiziegez gant hon mignoned, etouez pere na ankouain ket an Ao. Iwan Morvran.

Na baouezfen ket mar fellfe d'in komz deuz kement a zell al loden vrezounek. War wellaat eo et an traou. En em laweneomp, kemeromp nerz-kalon, ha labouromp startoc'h evit biskoaz er bloaveziou da zond. Na dleomp ket fiziout nemed enomp hon-unan 'vit difenn hon-iez. Mar tigoue ganemp lenn c'hoaz giriou vel ar re-man: « il faut s'appliquer énergiquement à extirper le dialecte breton, barbare relique d'un autre âge » greomp eun hinj d'hon diskoaz ha studiomp gwell pe well hon iez koz hag a zo 'vel ma lavare eul labourer douar, ken griennet e goueled hon c'halon ken n'ellfe biken oll eler houarn ar bed hen dizwrienni.

Kentoc'h troc'ha hon zeod eged diziski hor Brezounek!

Breiz da virviken!

EVNIK ARVOR.

Efflam Kerzenan ha Mac'haridik

(DANEVELL NEVEZ)

Gant Efflam An HENORET (Plestin-an-Traez).

Kendalc'h (4)

En oabl glaz ha sklaer na rede ket eur goumoullen, an avel a c'houez divar Sant Efflam, pa gemeraz an Itron Kerzenan ha Soazik, an hent evit mont treser ar maner.

Eno e kavjont Guillaume Rubeuz, breur an itron. Imposubl a oa d'ean bea deut kentoc'h d'ho gwelet; he affero u o devoa hen dalc'h stag en pad ar zun, ha goude e renkaz mont, he unan da welet madou unan benag, a glee kalz a arc'hant d'ezan, rag an notered na vez ked da fiout enhe!

Pa sonaz an eil zonn en Tremel, da laret d'an dud a c'hé prestik an oferen da gomans. Efflam Kerzenan hag he donton a gemeraz hent ar bourk; Efflam a c'he d'an oferen, n'eo ket abalamour ma re plijadur ze d'ean, mez evit lakad e vam da veza kontantoc'h, ampech anei da ouela.

Ho nan! ha pa zavaz ar belek e galir treser an nenv, pa c'hé hon Salver Jezus-Krist da zisken var an aoter, Efflam Kerzenan a vije chomet en he zav, penaved ober poan d'e vam; chomet a vije zonn en he zav, evit diskwel d'an dud ze, pleget ganthe ho fenn, penoz a vimprize kalir, hostif, belek hag all!

Pa zonaz toliou an anjeluz, ar merc'hed, ar botred iaouank gand o mam, o zad, a redaz da doull dor ar vered, evit klevet ar potr Jan Goz o skei deja var e daboulin...

Mac'haridik e lec'h chom gand an dud iaouank all da gonta kojou, a redaz treser ar gaer. Kemer a rejont, he zad ha hi, ar c'haran a c'hé d'ar Gaer veur; Mac'haridik, evel alao, a oa ganthi eur gwiskamant dister; eur roben du tenfall, dilezet he devoa memez an tok a zouge gwech all, evit lakat eur c'houef en e blas, mez pegen koant na oa ked gand ar c'houef-ze! He bleo melen, he daou lagad glaz! En he c'herc'hen, staget gand eur chaden arc'hant, e hije eur vedalen, medalen ar Werc'hez, honnez a zouge bepred evit delc'hen zonz deuz he mam; he dioujod gwen, he genou a vouze hoarze bepred.

Dre ma teuent deuz an iliz, an dud en em dastume en dro da Efflam Kerzenan, asten a rent ho dorn, evit rei d'ean pognou-main, goulou a rent diganthan keleier Pariz... A greiz tout, an oll a dec'haz evit rei plas d'eur wetur gaer.

An dud pinvidik-ze oa an Aotrou hag an Itron Keriell, gand o merc'h Fernande Keriell. Disken a rejont evit mont treser Efflam Kerzenan, chomet e unan en kreiz ar bourk.

Merc'h d'an Itron ha d'an Aotrou Keriell, Fernande a zal-c'he mad d'ar renk gleet d'ei; kemer a re faeson eur rouanez, zeder ha kontant deuz an oll; pa vije e hunan, al loden vraz deuz he amzer a dremene dirag ar miliour... pe o kromolad a eneb d'ar mere'hed iaouank all a oa koantoc'h evithi... o chikana an domistiked d'an disterra ma vije dishengalet he bleo, labeet he zog, pe chaket unan deuz he robennou.

Fernande Keriell a blije d'ei lakad dillad a liou; hirie a zo ganthi eur roben, na c'houvefen ked laret d'ec'h penoz! ker gwer, ker ru ha ker melen ma c'heo. Deuz adalek he boutou melan, beteg an tog a zoug var he fen, na n'eo henvel nemed ouz eur vaskaraden veurlarje; kaer he deve lakad traou faro, na vije jamez brao.

Petra a vije kaoz da ze? abalamour, marteze, na lake ket a amzer awallac'h da neur benta?... N'eo ket, rag ken aliez ha ma vez eun dansou, pe eun interamant benag, e tremene da neubeuta div heur dirag he miliour. Den abad na nevoa troad ken bihan ha hi, daouarn ken gwen, nag eur c'horf ken moan: mez ar pez a lake anei da ouela, oa he bleo, kaer he dije lakat ha frota livaj diouthê, ho na brasa dizesper, chom a rent bepred ru; hag eur wenanen, zavet en koman-samant miz ebrel, na n'ee ked kwit ive! hag en despet d'ar louzou a lake varnhi bemde, hi zal-c'he da greski!

En pad ma kozee Efflam Kerzenan hag he donton deuz an Aotrou hag an Itron Keriell, eun dintin goz benag en em dastumaz, evel ma man bepred ar c'hiz, en toul dor ar vered evit konta ar c'heloioù.

— « Sellet eta deuz merc'h an Aotrou Keriell, a laraz unan anhe, pegen kaer a c'heo en em lakel, marfad e deuz c'hoant da blijout d'an Aotrou Kerzenan!

— Na vije ked re difaeson, memez tra, a laraz unan all, penaved he bleo ru!

— Ar reze a zo o vont da zemei breman, a dra zur?

— Abalamour da betra? a a c'houennaz unan all.

— Unan anê a zo pinvidik, egile a zo koant, evelse a c'hell an traou en em engali! Ha neuze klevet a meuz penoz e donton a neuz gret an affer!

— Peuc'h, setu aman an Aotrou Person!

Azeet en ho c'hichen, heb laret man ebed, Yvonaik ar Baourez a zanje enhi e-hunan: « Me a c'hanve eur plac'h iaouank neuze, biskoaz, nan biskoaz! aboue ma c'hon o chom dre aman, na n'on bet aet d'he zi heb bea digemeret mad. N'on ket deuz pelec'h eo deut, mez ar pez a c'hon eo e kar ar bevien. Honnez a zo kab da lakat unan benag evuruz ive; mez beza paour na n'eo ket brao! N'euz forz penoz e man kont, c'han bepred da laret eur beden evithi hag evit he zad! »

Neuze, Yvona a dennaz deuz he godel he rozera, evit pedi an Aotrou Doue da rei e vennoz d'ar reze a gare kement; Yvona oa c'hoaz o pedi, pa welaz Efflam Kerzenan hag an Aotrou Keriell en ein gwitad. Mont a rejont peb hini gand e hent, neuze e donton Guillaume Rubeuz a c'houennaz digant Efflam:

— Lavar d'in eta, Efflam, penoz e peuz kavet anezi?

— Piou?

— Mez Fernande Keriell eta!...

— Fe, na meuz kavet anei na mad na fall!...

— Penoz, na mad na fall?

— Aboue ma n'e meuz ket hi gweled eo deut na veza braz kenan! Mez evid goud petra c'heo Fernande Keriell, eo red anaveout anei gwelloc'h; arru oa torret ma fenn o klevet anei o varbillad!

— Kenta gwech, eme e donton, kompren enhi gwelloc'h, sethu aze eur fortun vad, heb konta an daou heritaj a zigoueo d'ei, hag an ti a dri estaj he deuz duze en kostez Sant Efflam, el lec'h ma c'heont da dremen an hanv, ha duze pelloc'h, eur c'hastell all gand eun daou ugent park benag en dro d'ean. Setu aze pegen pinvidik eo merc'h an Aotrou Keriell, ar zonzj a haller kaout kement-se a vadou, mechanz, a gle lakat an den evuruz...

— Kredet ac'hanon, a respontaz Efflam Kerzenan, nag a mije bet kement tam douar zo dre aman, na vijen ket bet evurusoc'h!

— Beteg laret traou evelse e kas ho tiskamant ac'hanoc'h! Setu aze eta an traou a zisk d'ec'h ho leoriou! Koulzkoude an arc'hant! penaved an arc'hant na n'oc'h netra!... Penaved an arc'hant a vevel er vizer en pad ho puez!...

Daoust hag hen pa gever eun okazion evel homan n'eo ket gwelloc'h hen kemer! Daoust hag hen pa gever ar forvad na glee ket digeri d'ei an diou vrec'h gand joa? Ha lezel a gostez al leoriou ze, a ziskuez ar bed d'ec'h var an tu gin!...

— Mar kav d'ec'h a meump ni trawalc'h a blijadur en mesk hon leoriou, en em drompet... Ober a reomp ar pez a vez posubl ober evit kaout plijadur... ha goude na chom ganimp nemed mimpriz evit ar bed, hag evidomp hon unan!

— Ebarz em amzer-me, Efflam, na vije ket evelse, goud remp kemer ar vuez vel ma teue...

— Koulzkoude, ma zonton, oac'h ive pe ll deuz bea Sent!
— Gwir eo na oamp ket evel Sent, mar kerez, mez gwelloc'h oa an dud neuze evid en devez a hirie!

— Evit laret, memez tra, a respontaz Efflam, laromp penoz en hoc'h amzer c'hui, evel en amzer-man, a oa tud fall ha tud vad!

— Ac'hanta ia! Mez ar pez a meuz da laret d'id, na zonzjer ket awalc'h en amzer da zont. Me a zo zur hon tadou koz na dije ket marc'hatet evit mond da vab kaer da gastell an Aotrou Keriell. Goud a ran marteze, penoz an Aotrou Keriell a zo kemeret dre aman evit bea eun den pemoc'h, abalamour na ro ket an aluzen d'ar bevien... Ma ne ro ket an aluzen d'ar bevien, eo abalamour d'ar bern komerezed-ze da chom er ger... ha neuze, kompren awalc'h a rez, penoz ma karje komans da rei da unan benak, na vije fin ebed!... Laret a rer c'hoaz penoz den iaouank ebed na zemeo da Fernande Keriell, eur vech ma nevo sellet deuz ar chas a weler eno stag en toull an dorjou, prest da vervel gand an naon. Ar sort kojou ze na glee ket ho zelaou!...

Da iaouankiz, da vicher memez, a c'houlen diganed evel eun dever, non paz chom da unan. Ha kred ac'hanon penoz eo trist buez eur potr koz. Trist eo evid da donton zonzjal a zo dre aze, dindan ar gwez dero, o konta kojou, tud de-meet, pegen evuruz na nint ket asamblez var bord ar prajeter, lusketel gand trouz an dour o redek, ha darn all o labourat er parkeier. Hast buan ive ober evel ar reze kemer eur plac'h da zikour ac'hanout. Goud a rez en para stad a c'heo lakel douarou Kerzenan! N'eo ket evel reproch eo a laran d'id kement-ze, gand ar frêjou a zo bet o tiski ac'hanout. N'ouzouz ket penoz an interest he deuz da vam da baea bep bla d'an aotrou Keriell a e ha da gement, hag ar goul Mikaël e peuz da douch... Doue hebken oar pegement a boan he deuz bet da vam, er c'heid ma oaz oc'h ober da studi en Pariz! En hano da dad! gra eta ar pez a laran d'id, laka evuruz da baour kez man, he deuz skullet kemend a zaerou... »

IV

Ar wel deuz Fernande Keriell na reaz eta netra da Efflam Kerzenan. Marfad ar wel deuz Mac'haridik na reaz ket ar memez effed var e galon, mez Efflam a zante na oa ket net awallac'h he galon, evit zonzjal en eur plac'h iaouank evel honnez pehini a ziskoueze mad d'ean e oa posubl beza vertuuz.

(Da herit)

Eur veaj en Douar Santel gwechal goz

En eur c'hastel euz a c'houeled Leon, a choume var dro an daouzekved kantved, eun dijentil pinvidik hag oa hanvet an Aotrou Koatjunval.

En amzer-ze, kalz euz an noblanz a rea beaj an Douar Santel evit bizita al lec'hion brudet etouez ar gristenien dre m'hen devoa eno hor Zalver J.-K. paseet e vuez, ha dre ma oa ive bet lakeat eno d'ar maro. Ar veaj-ze, evit Breiziz dreist holl, a ioa, d'ar poent-ze, hir ha poaniuz braz da ober. Treuzi a rankel broiou hanter c'houez, kalz anezo; an hent-chou a ioa diez e heb fesoun; en em goil a rea aliez ar beledined; lod a goueze etre daouarn laeron pe dud c'houez; kalz anezo ne zistroent ken d'ho bro.

An Aotrou Koatjunval eta a roaz eun deiz da c'houzout d'e dud en doa graet veu da vont da Jerusalem, hag he kasje gantan an eil euz he vipien.

Pa erruaz an deiz na tie an daou belerin en em lakat en hent, ar c'hlac'har a oue braz er c'hastel ma reant ho demouranz. An Itron, an Dimezeled, an Aotrounien iaouank hag ar vignoned a ouele oll dourek. Poket a reant marteze evit ar vech diveza d'eur mab, d'eun tad, d'eur breur, da vignoned ken karet.

Setu eta an daou zijentil en hent var heb a varc'h kaer meurbet; var dailler peb loan e zoa eur valizen; enni edo an arc'hant hag an dillad a oa ezoum da veaji. Treuzi a rejont Breiz, Bro-C'hall, an Allmagn, ar Gres. Peurvuia e paseent an noz hag an amzer fall er c'hastel hag er c'houentehou a gavent var ho hent. Goude bea beachet epad tost da vloaz, setu hi en em gavet e kear Konstantinopl.

Goude beza paseet ar vrec'h-vor hanvet Pont-Euxin e lakajont troad var douar an Azi. Ar rest euz ar veaji a oue tenn beteg Jerusalem. Hor pelerined ne gavent mui kazi nikun d'o digemeret; er c'hountrol, an Durket paianet, mistri ar vroze a rea d'ar gristenien soufr a heb seurt poaniou. Goude kalz a drubulioù, Koatjunval hag e vab ho devoue koulzskoude an

eur-vad da c'hellout erruout e Jerusalem. Daoulina a rejont dirag bez hor Zalver. Mont a rejont ive beleg ster ar Jourdren.

Goude beza en em ziskuizet epad meur azervez ha dskwizet he c'hezek, Koatjuval hag e vab a zounjaz en em lakat adarre en hent evit distrei d'ar gear.

Goude beza kerzet eur pennad mad, hon daou belerin a velaz e oant en em faziet ha n'edont ken var an hent mad; kaer ho doa bale, ne gavent ket ho hent. Edont dija e-kreiz ar broiou gouez euz an Asi-Minorez. Meur a nosvez-venn ho devoa graet; feaz oant gant ar skwisder; ho c'hezek ive a ioa skwiz-marzo; ne valent ket koulz lavaret. Neuze ar mab a lavaraz d'he dad:

— « Va zad, emezan, n'oump ken evid mont araog; erru eo adarre an noz; daoust ha ma zafemp da renoz er c'havarn a velomp anan.

— « Gwir a levez, va mab, eme an tad; izoum hon deuz da eana eur pennad, ha da zibri eun tam. »

Staga rejont ho c'hezek ouz diou vezen en eur lezel ganto kabestr hir awalc'h da c'hellout peuri, hag ec'h antrejont er c'havarn.

Allaz! gwelet a rejont buhan n'oant ket en em gavet mad.

Diouz an doare euz an toul-ze e choume eno eun den gouez bennag. En eur c'horn-tro e zoa eur bern krec'hign denved; an oant a loje eno asamblez gant ho mestr. Mez petra da ober?

« A volonte Doue, eme 'n tad, choumonp ama. » Dournet ho c'horvou gand ar skwisder, ez edont o vont d'en em rei da gousket pa glefjont trouz e kichen antre ar c'havarn.

Kerkent an denved a antreaz, ha var o lerc'h ho mestr, eur pikol den gouez. Lakat a reaz da zervichout da zor eur pezh-mean braz. M'ho lez da zounjal an enkrez ho doa eno Koatjunval hag e vab. An den-gouez a gavaz diouz-tu an daou veajour, hag o veza ho mortuged, e krogaz en aotrou iaouank:

« Va doue! va zad! eme an dijentil. »

Diouz-tu, an den gouez a laka e gorf paour e daou-banter en eur jacha var e vemprou. Ober a ra neuze eun tantad tan; resti a ra eul loden euz a gorf ar paourkez den, ha goude beza debret leiz e gov, ec'h en em laka de gousket.

An tad paour ne gouske ket. Choum a ranke eno, rag n'oa ket ive dilam kwit ar mean braz a zerviche da zor var ar c'havarn. Erfin e kemer ar mennoz da venji maro he vab.

Goude beza lakeat en dro d'ezan daou pe dri groc'henn danvad, e krog e daou gef tan, unan e peb dourn; lakat a ra anezo e daoulagad an den gouez; hema 'zo dallet. Kunudi a ra; mez gouzout a ra piou 'zo kaoz euz he boan. Mont a ra da lamet ar mean-dor hag a lez da vont er meaz e zened hini hag hini en eur vale var he balochou, en em zil er meaz etouez an denved.

Koatjunval en em hast neuze da zével var al loan gwella. En em lakat a ra adarre en hent, breved gant ar c'hlacl'har hag ar ran-galoun. Pa oue erruet eur pennad mad ac'hano, e velaz eul lioun braz o lipad he droad, an aneval a rea outan sellou truezuz. Petra da ober? « Deomp, eme Koatjunval da velet petra en deuz en he droad an aneval gouez; ne vezo ket gwasoc'h d'ign beza lazet gantan eget en eur fesoun all. » Disken a ra eta divar he loan ha mont a ra etrezek al lioun; gwelet a ra en deuz en he droad eur pezh dreañ hag en tenna 'ra er meaz.

Kerkent an aneval a zao en he zao; heuil a ra he vadoberrour evel eur c'hi a heuil he vestr. Edoug an hent, al lioun a gas pell dioutan aneval ha tud c'houez.

Koatjunval a zigwezaz erfin var an hent mad; al lioun en heuilaz beteg ar gear. Lezet e oue da veva libr, ha ne reaz biskoaz droug ebet na da zen na da aneval.

Koatjunval a ioa bet var dro pevar bloaz oc'h ober he dro e Jerusalem. N'em laoueneaz ken ar rest euz he vuez. He lioun a joumaz beo var he lerc'h. E glevet a reat neuze a ziabell o kunudi gant ar c'heuz en doa d'he vestr; ne dardaz ket ken nebeut da vervel.

Var mean-bez Koatjunval e oue great he skeuden gant eul lioun etal he dreid. Lenn a reat var ar mean-bez-ze ar c'homzouma e brezounek:

Koatjunval 'zo bet beteg ster ar Jourdren,
Hag a zo dizroet ac'hano heb he zen.

Ploueskot.

Loiz AR ROZ.

Ar Biniou o klask an aluzen

Eun devez oan o lenn « Pipi gonto » barz em c'hambur. Va spered oa nijet eun tammik d'am Bro Breiz-Izel var diouaskel ar c'houn; seblantout a re d'in beza o chilaou eun daneveller koz benag vel em zi gwechall.

Raktal e kleviz eur muzik a zeue deuz ar ru, eur muzik m'oa klevet aliez c'hoaz, mez oan ket vit n'em

renta mad kont petra oa. Setu me digori prest va frenest ha lakat va fenn er mez O! na pebeuz gweladen! Eur paourkez den dall, oajet mad ha gwisket e giz va bro, a zeue gand ar ru d'abenn, bleinet gand eur potr iaouank, gantan var he vruchet eur skritel sterniet. Ann hini iaouank n'em doa nemet eur vrec'h hag eur pen-baz oa gantan enn'he zorn. Ann hini koz oa gantan eur zac'h soner.

Deustu me velaz oant daou glasker bara. Mez el leac'h lavaret o fater e korn ann doriou vel ma reer e Breiz, vit goulenn ann aluzenn, ann hini koz a c'houeze enn'he zac'h vit lakat da zistrei outho evez ann dud.

Eur vandenn marmouchen a gerze var o lerc'h, 'n eur c'hoarzin, hag ann dud 'n em lake 'n ho frenestou vit sellet outho. Ar gweled a gement-se a rannaz va c'hallon. Penaoz, emezon, ar biniou, benvek a blijadur, deut da veza eur rebet vit klask ann aluzenn? Ha c'hoaz er vroiu-pell el leac'h n'eo ket anavet gand ann dud? Oan ket vit ansao kement-se. Koulskoude ze oa gwir pa hen gweled dirak va daoulagad.

Ha me diskenn d'ho c'haout. Deuz kichen Pont n'Abad oant ginidik o daou: n'oa mui den var ann douar, den ebet vit gounid d'ezo bara. Rankout o d'oa kuitat o bro pegwir ho zi oa bet gwerzet aboue daou-vloaz; oant o redek ar vro vel-se. Ne ouient ket pelec'h e oant na da beleac'h e zent. Gand ann aluzenn e vevent hag enn eur c'haou bennag e kouskent.

Na pebeuz planeden vit daou Vreizad! Ann hini iaouank ouie eun tamm gallek, mez ann hini koz ne ouie ket. Kerzet a rent eta deuz ann eil kaer d'eben, dorn-a-dorn, heb gouzout var zu pe heol e valeent. Ann aluzen a riz d'ezo hervez ma gallout, ha goude m'oa kollet ar gweled outho, me bignaz enn dro d'am c'hambur. Va c'hallon oa ankeniet gand ar pezh em oa gwelet.

Na perag, emezon, n'eo ket chomet ar re man e Breiz-Izel. Daoust ha kalonou ar Vretoned a zo sklaset ha na reont ket mui ann aluzenn d'ar paour?..

Paour kez biniou! Paour kez Bretoned!

Eu (Seine-Inf.)

POTR AR C'HAP.

N I J E T ...

Eun toullad deveziou hon doa hen anveet,
Evuruz a vijemp dalc'hmad ouz e glevet.

War e zremm a vije eur mouse'hoarz dudiuz
Hag en e zaoufagad eur zell frugarezuz.

Ouz e galon dener e teue hep paouez
Komzou madelezuz, komzou leun a furnez...

Beza oa 'barz an ti eun ael a garante,
Dre lec'h ma tremene peb tra a hadbeve.

E vouez krenv ha sklintin a domme peb kalon,
Bezan a oa d'an holl eur breur hag eur mignon.

Karout 're peb unan, peb unan hen kare:
E spered a oa eon, dinam oa e vue...

Gantan e tremene re vuhan an amzer:
Ar blijadur a deu en dro gant founuzder.

Eur pennadik an den zo seder ha laouen
Al levez, siouaz! na bad ket da viken.

Eun devez, ma Doue, an evn meurbed karet
Euz dindan hon zoen prim a zo bet nijet...

Euz dindan hon zoen eo et a denn-askell,
Douget war an avel ha kaset d'eur vro bell.

Oh! nag a boan-galon o kimiadi outan
Oh! nag a zaerou kri hon deuz skuillet d'ezan!..

Gwelet a reomp c'hoaz e genavo poaniuz
Vel ma klevomp ive e hirvoud truezuz...

Pa oa e unanik, gand an holl dilezet,
O vont war zu ar gêr marvad an euz gouelet...

O gwellan da envor en euz lezet 'n hon zouez,
Ennan, pa 'z eo nijet, e sonjomp aliez!

Krizder an Donkadur, perag evurusted
E tremenez buhan, buhan vel al luc'hed?

Te a zo henvel beo dimeuz al lapousik :
Eveltan ez out skoemp, eveltan out spontik...

A-boan out tanveet, kerkent ez out tec'het,
Lezel rez war da lerc'h kalonou glac'haret !

Ar vue er bed-man na n'eo nemed avel
Enni peb plijadur zo finvuz ha marvel !

Ar bed evid an den na n'eo ket eur gwir vro
N'eo nemed eun draonien, eun draonien a zaero..

Ennout 'man ma fizianz, Baradoz dudiuz
Rag ennout-te hepken peb tra a vo paduz !

Synt-Servez

AR YEODET.

AN DAOU VARZ

BARZ AR MENEZ

Barz an Arvor lavar d'in-me
Kaer eo da vro 'vel ar mene
Vel ar menez da c'houlou deiz
Hanter guzet dindan ar gliz !

BARZ AN ARVOR

Mar deo ker kaer ar menezioù
Da vintin gand ar glizennou
Kaeroc'h ar mor alaouret oll
D'an abardaez pa guz an heol.

BARZ AR MENEZ

Tud an Arvor ne glevont ket
Kan dudiuz al labouset
Sul ar voualc'h, kan an eostik
Hini an drask, ar boc'h ruzik.

BARZ AN ARVOR

Nan, ni ne gleyomp peurvuia
Nemet gwennili o lenva
Mez ni gar o c'hlem hirvoudus
Hag o c'hournij troidellus.

BARZ AR MENEZ

Er menez e zeuz gwez huel
D'hor goudori diouz an avel
E sked brankou hor gwez dero
En hanv hor beuz disheolennou.

BARZ AN ARVOR

Ma n'hon deuz ket a wez dero
Gwiniz melen zo en hor bro
Ha sourral reont goustadik.
Dindan alan an ezennik.

BARZ AR MENEZ

Daoust ha c'houi o peuz foenneier
Marellet gand bokejou kaer
Feunteunioù skler o peuz ive
Dour mad o redek aneze?

BARZ AN ARVOR

Ma n'gon deuz ket a foenneier
Na kement a vokejou kaer
Ar bizin druz dantelezet
Ouz hon reier na vankont ket.

O vale var an aod gwen kan
Dirak ar mor braz ha plean
Gand plijadur me sonj bemde
En brazder an Aotrou Doue.

BARZ AR MENEZ

A c'houi a glev mesaerien
O kana joaius ha laouen
En o mensesioù o viret
Bandennou braz a loened ?

Kaer eo sonik ar mous bihan
Pa vez o tont var zu egoan
Gand e vouezik sklear ha skiltruz
Araog ma son an Ajelus.

BARZ AN ARVOR

Allaz, mignon, hor soniou-ni
Eo trouz ar gwall vor o c'hoari
Pa vez o strinka eonen
Dre nerz estlammuz ar wagon.

Koulskoude hor Martoloded
En o bagou a vez klevet
Eur vech an amzer o kana
Kantik an Itron Varia.

AN DAOU VARZ ASAMBLEZ

Kaer an Arvor, kaer ar Menez,
Kaer eo hor Breiz, hor c'harantez
Hon telennou ne skuizint ket
O kana bro goz ar Varzed.

Ha pa vo nijet hon Ene
Euz Breiz-Izel varzu an Ne
Er Baradoz c'hoaz ni garo
Bro ar reier hag an dero.

Louis AR PACH.

Kernouez.

TINA

Oh ! Kazusan bue ! Epad an de staget
Var eur bank 'uz d'eun dôl... Ma fenn marv ha pleget...

Ma lagad o redek mesk eun bern paperou...
Epad ma iaouankiz setu ma labouriou !

Oh ! pegen evurus 'vijen bet en Kerne,
Digabestr ha dinec'h o c'halioupad mene,
Traonien, koat, ha lannek, pe o chilaou en noz
Huchadennou skiltruz ar gaouen 'barz ar roz
Ha trouz sklinton an dour o koueza er vilin
Elec'h e man Tina, Breizadez ken ker d'in.

Mez alas ! euz Kerne, euz Tina, aman na neuz hini...
'Vit douster d'am c'haloun na meuz nemed ar spi.

En Tina pa zonzan en kreiz ma labouriou
E stlapan pell ouz-in ma fluen ma leoriou,
Ma fenn en em daouarn e choman morgousket
Ha ma spered a nij 'tresek ar vro garet.

Kaeran hunvre 'ran me ! Gwelet 'ran en he milin
Eur plac'h iaouank ken koant, ken brao ha ken lirzin
Hag eur goulmik gwen glan, kuzet 'barz ar c'hoajou
Elec'h a vesk he c'han gant zon an aveliou.

Oh ! red eo hi gweled ! he lagad du, tener,
'Zo leun a garante a spi hag a zouster ;
He divieus rozennet 'zo fresk ha birvidik ;
Biskoaz 'zon dudiuz 'vel hini he mouezik.
Ah ! red eo hi gweled ! Pa zav gant ar mene
He zroad na skoill biken : skanv eo 'vel an êle,
Zonn he fenn, flamm he zal : he bleo du lugernuz
A ziruill war he skoa, hir, ha flour, ha skeduz.
Set-hi duont da krouec'h, pignet war eur roc'hel
Waz griben ar mene. An avel a c'hwitel
Goustadig 'n he c'herc'hen, 'mesk he bleo dispaket.
Gant an heol-hanv o kuz he zremm 'zo sulaouret.
Na sklinton eo he c'han ! He mouez eun tam a gren
'Vel hini eur durzunel, war beg eur goz derven
Kollet gant-hi he far : « O glac'har ! Ma mignon
« Pelec'h out ét, emez-hi ? Rannet eo ma c'halon ! »
An hekleo euz he iouc'h a ziston er saouen,
A sko 'barz ar reier 'zo euz krap an dosen.
...Alas ! Mouez all e-bed na respont d'he hini
Mez en deün koat ar roz, c'hwitello ar mouilc'hi.
Ha me a zav ma fenn, dihunet, frealzet,
Nag a gounar neuze pa welan 'choun kabestret.
Tina en deuz am gelvet... Oh ! Kaeran plijadur !
Mez n'oun 'vit respont d'ei !... Oh ! gwsa tonkadur
Ma c'halon en em c'hreiz a rann, ha me a ouel
Rag en dristigez an daero 'zo 'vel mel...
Eun douster 'vit ar boan, eul louzou d'ar gouli...

A greiz holl 'uz d'am fenn e kan eur gwennili..

— « Gwennili, evnik koant, c'houi a c'ha ken buan,
Et tresek bro Tina, et, 'vel al luc'hed tan.

Da vintin pa zavo, nijet war an doen
Uz d'he zor, ha kanet. Tina 'zavo he fenn :
Neuze, Oh ! pa welfet he lagad ankeniet

O sellet ho hini, mar be he zremm glebiet
Gant an daerou, evnik, en ho kan ar bravan
Laret d'ezi : « Tina, me a zo deut aman

» 'Vit skuill en ho kalon ar spi hag an douster...

» Duont e meuz gwelet, pell, en eur vro dister

» Ho mignon divroet. Bezet laouen ha drant !

» An hekleo euz ho iouc'h, plac'hik, Breizadez koant,

» N'euz distonet 'n e greiz ; a dreuz ar menezioù

» A neuz klevet duont ho kalv, ho hirvoudou.

» Tina, na welet ken, dizammet ho klac'har !

» Gwelet 'meuz eur Breizad, eur Breizad hag ho kar ».

Oh ! neuze, gwennili, mar gwelet he lagad
O lugerni, skedus, leun a joa hag a stad,
Mar gwelet war he ieus eur vous c'hoarz dudiuz
Kalz dousoc'h d'ar galon, 'vit an heol ruz o kaz,
Nijet a denn-askel, da krouec'h 'uz d'ar vilin,
D'an traou a rez d'ar stang leun a drouziou sklinton,
'Vit kanan pegen kaer eo ar spi d'ar galon.

Et, evnik koant, et primm : da Dina oun mignon.

“ ROCHLANN ”

DIHUN BREIZ

WAR DON MARZIN : “ Breman trizek mis ha leir sun ”.

I

An de a darz, an heol a bar *(bis)*,
Dispak a ra dremm an douar ;

Sav adarre

Mamm Breiz va c'harante,

Sav adarre

Sethu ar beure.

Ar gliz a c'hoarz war bep delien *(bis)*
An eün a gân war bep gween ;

Sav adarre, etc.

Ar mene 'wisk e zae velen *(bis)*,
Ar Varzed a grog 'n o zelen.

'Mant holl aman dirak da di, *(bis)*
Da vibien deüt d'as saludi.

Dastumet int aman fenez *(bis)*
O klask diganid da vennoz.

Mar prizez diouté c'hoarzin, (bis)
 E kânfont ken kaer ha Marzin.
 Mar tolez warnê da lagad, (bis)
 E kerzfont dizoan d'an argad.
 Mar sav da zorn uz d'o fennou (bis)
 E vruzunfont da chadennou ;
 Hag e trec'hfont war an dachen (bis)
 Vit ma reni da virviken.
 Sav adarre, etc.

II

Ha Breiz-Izel a zo savet, (bis)
 Kousket ganthi meur a gantved.
 Dihunet e
 Mamm Breiz va c'harante,
 Dihunet e,
 Sethu deut an de.
 Gwisket ken grân evel gwechall (bis)
 Arôg ma anveaz Bro-C'hall.
 Dihunet, etc.
 Gwisket en' aour hag en perlez (bis)
 Vel en amzer 'oa pennerez.
 Neuze gant stad he deuz c'hoarzet (bis)
 Ouz e mibien, ouz he barzed.
 Ha lakaet he dorn war o fenn (bis)
 D'o c'hennerza vit he difenn.
 Kerkent an telennou da zôn (bis)
 Ken o c'hlever dreist ar mor dôn
 Ha mouez potred Breiz da zavel (bis)
 Keit ha ma tap c'houez an avel ;
 Hag ar C'helled holl da iouc'hal (bis)
 Vel en o emgannou gwechall :
 « Breman ne zo war hon gourre (bis)
 « Mestr ebet ken nemed Doue ! »
 Dihunet e
 Mamm Breiz va c'harante,
 Dihunet e
 Sethu deut an de.

T. AR GARREK.

EUN NEUBEUD KOMZOU

Lavaret gant
 an Aotrou **CARDINAL**
 person **Sant-Vouga**
 da **Gevredigez Broadus Breiz**
 e maner **Keriann, d'an 12 a viz Gwengolo 1905**

N'ho talein ket nemeur, Itronezed, Aotronez ; mall eo ganeoc'h klevet *Paotred Sant-Vouga* o tisplega dirazoc'h mezaoliou « Job al Lounker » ha troiou fentus great ha c'hoarvezet gant « Alanik al Louarn ».

Mez penaoz chom heb trugarekaat au Aotrou Komt de Coatgoureden euz ar vadelez hen deuz da rei he vaner kaer evit ober ar pezh labour-ze ? Heb dan ne vije bet great aman netra nag hirio na diagent. Ah ! kousket oa a bell-zo hekleo kastell Keriann ! Sethu hen dihunet, ha dihunet evid mad.

Mil bennoz d'eoc'h ivez, Itron ha Dimezelled de Coatgoureden, nag a boan hoc'h euz kemeret evit lakaat ho maner koz e stad da reseo an dud enorus zo ennan ; na pebez taol lagad ! na pebez ijin hoc'h euz renket kaout evit klevet ouz peb tra, evit chom heb ankounac'haat na den na netra. Ho taouarn ho deuz redet skanv var ar paper epad ar pemzek de-man, n'ê ket ta ? Mil bennoz d'eoc'h. Ho tigoll a gavoc'h, Itron ha Dimezelled de Coatgoureden, en anaoudegez a gavoc'h e kalonou an dud enoret gant ho tigemer. Goest int an dud-ze, leun a furnez, a skiant hag a zeskadurez ma zint, da anaout an enor great d'ezo.

Oc'h henvel a ran da genta, Aotrou markiz de l'Estourbeillon, Kannad ar Morbihan, rener braz Kevredigez Bro Breiz. C'houi daoust d'al labouriou braz oc'h euz da ober e Paris, a gav amzer c'hoaz da rei d'ho kenvroiz

Breiz-Izel, skoazel evit ma c'hellint miret ho Feiz, ho lez, ho giziou koz. Trugarez d'eoc'h evid an enor a rit hirio da barrez Sant-Vouga.

Oc'h henvel a ran, Aotrou kont de Guébriant, maer Kastell : brud euz ho madelez, euz ho kwiziegez zo eat e peil-bro. Rak-se pa oue hano da Gevredigez Bro Breiz en em voda evit an Emgleo, oue mall ganti dibaba Kastell-Paol evit kaout frankiz da ober he labour.

Oc'h henvel a ran, Aotronez Vallée, Lajat, Jaffrennou, Le Berre, ha c'houi, va c'henvreur, an Aotrou Chaloni Bossard, c'houi holl zo dija brudet dre ho skridou, ho kanaouennou buezek, ha var brudeta ez eoc'h bemdez dre al labour a gendalc'hit gant kement a galon.

Mez penaoz c'houi, Aotronez holl brudet, eo bet plijet ganeoc'h para ho taoulagad var eur barrezik ken dister ha Sant-Vouga ? Kredi a ran oc'h euz klevet uhelloc'h c'hoaz eget mein kizellet ha renket a zoare a veler aman, mouez *Potred Sant-Vouga* hag hini o rener. N'eo ket d'in-me ober ho meuleudi. Mez anaout a ran ar c'hoant hag ar mennoziou zu en kalon ho rener ; anaout a ran evit petra e ro e zeveziou hag aliez e nosveziou ; gouzout a ran evit petra e tispign e boan, e arc'hant, e iec'hed zoken, ha pe gwir ho anavezan, perag n'ho lavarfen ket d'eoc'h e berr gomzou ?

C'hoant en deuz startaat ar Feiz e kalonou e genvroiz, hag evit-se, euz deuet sonj dezhan euz unan hon lavarou koz :

« Ar Brezonek hag ar Feiz
 « Zo breur ha c'hoar e Breiz. »

Ho tud koz, va c'henvroiz ker, abaoue ar deiz m'ho deuz bet an eurvad da anaout ar gwir Doue, da anaout karantez dispar ha trugarez Jezus, da anaout dousder ha teneridigez e vam ar Verc'hez Vari, zo en em roet a wir galon d'ezho. Touet ho deuz bet var ho lê beza fidel d'ezho, ha n'int ket eat enep ho ger. Dre ar c'hantvechou ho deuz servichet kaer ho fromessa ; testou int a gementse hoc'h ilizou hag o chapellioù niverus skignet dre pevar c'horn ar vro, gant ho sent mein pe goat ho deuz treuzet ar c'hantvechou, hag a gendalc'h hirio c'hoaz da vouse'hoarzin laouen ouz bugale ar re o deuz o c'hizellet ; testou int ho touriou savet ken huel ha kizellet ken kaer, hag a zeblant kas ho pedennou betek an nenv ; testou int ho kroaziou savet en peb kroaz-hent, hag a zo astennet ho divreac'h evit beniga hor maeziou, hon tiez, ar veachourien, an holl. Douar ebet, dindan an heol, hag a ve ken tost d'ar baradoz.

C'hoant hor beuz e talc'hfac'h d'o gwiskamanchou koz. Douget int bet gant ho tud araozoc'h, gret int euz ho toare da veva : humbl int avechou, mez deread atao, ha kaer aliez, dishenvel deuz an eil parrez d'eben ; a bep liou, a bep ment, a bep furm, e reont en hor pardoniou braz ar Folgoet, e Rumengol, e Santez-Anna Palud, ha mar kirit e Sant-Yan Keran, evel eur boket kaer, dudiuz da weled. Evelse ebarz er prad e zeuz bleun a bep liou, a bep ment, mez holl kaer, holl laouen, holl o lavaret meuleudiou an Aotrou Doue, hen deuz o gwisket ken koant.

Perag ho dilezel ? Evit heuil giziou kear ? Livirit d'in ha ne ve ket diskiant, merc'hed iaouank, lezel ho koef-fou ker koant, ker gwen, ken laouen, evit eun tok mourfount a bevarzek gwennek ! Livirit d'in ha ne ve ket diskiant lezel ho tillad frank ha modest evit en em senklenna e giz ar c'hezec a zoug an dibr !

Lezit kement-se gant gragez ha bugale ar vicherourien kear o deuz great faë var ear mad ar meziou, var bleun ha frouez ar parkeier, evit mont e toull hudur kear, da ober an oll micherieu dismeganset, da heuil ar glaou douar, da heuil ar c'hirri ne c'hellont bale nemet en noz, ha micherieu all c'hoaz, ha ne lezont gant ar re a rank o ober na sul, na gouel, na frankiz ebet eneb doare.

Dalc'hit d'h iez koz, ar brezonek. Ia, koz ! Kosoc'h eget ar gallek, kosoc'h eget hini eted euz ar iezou a vez komzet e Frans ha zoken en diavez bro. Ganthi eo bet savet hon tadou, hag ho furnez o deuz pinvidikeat anezi dre al lavarou skiantek o deuz kavet ha desket d'ho bugale, hag a zo deut a rum da rum beteg ennomp, ne vezent mui kollet, rag moullet int darn anezho hizio e kalz skridou gant tud gwiziek, ha moulletoc'h c'hoaz e kalonou an dud a gar ar brezonek. Lavaret em euz.

di « anezho », rag kalz zo bet kollet, ha ken aliez gwech ha ma tisken er bez unan euz hon tud e c'heller lavaret e tisken ive ganthan eul-lodennik euz ene Breiz.

Ia, ar brezounek a zoug ene Breiz. Hor c'hantikou brezounek, hor gwerziou, hon lavarou, hor rimadellou zoken a zo dispar; n'ho c'haver ket el leac'h all na ken saourapl na ken leun a furnez ha a skiant. Gantho omp bet luskellet; var barlen hor mam hor beuz ho desket, gantho hor spered zo bet sklerijennet, hor c'halon tommet, hon daerou sec'het. Gantho daou benn hor buez ho deuz paret splann dirag hon daoulagad. Ia e gwirionez, ar brezounek a zoug ene hor bro. Lemmit digant eur Breizad an anaoudegez euz he iez koz, ha setu an denvalijen var e spered, var e galon, var an hent a dle da heuil evit tremen ar vuez-man, setu ar maro. Ar brezounek eo an heol zo ouz hor sklerijenna, n'hen ankounac'hañt morse.

Hag evit petra e lesfac'h ho brezounek, mammou Breiz? Evit beza dismeganset gant o pugale evel ar vamm goz-ze euz eur bourk demdost da heman, ne c'helle lavaret ger ouz he bugale vihan dre noa bet disket dezho nemet gallek, ha pebez gallek!

Ho ne lavaran droug ebed euz ar gallek, med eo hen diski, red eo zoken hen ober hizio, mez kement-ze ne viro ket ouzoc'h da rei ar plas kenta d'ho iez koz. Eun den a anavez diou iez, a dal daou. C'houi a ouezo diou iez.

Ha evit krenna berr, mall eo! e lavaran hag a lavarin gant an Aotrou Luzel ar c'homzou a gavan e penn diveza « Alanik al Louarn ».

Keit 'vo karrek en aod ar mor
'Kano ar barz war dreuz e zor
Bepred en iez koz an Arvor.

JELVESTRIK

Ar Chouan Bihan

TRAJEDIEN EN PEVAR ARVEST

Gant an ARC'HANTEK

(Kendalc'h)

AR MAB

Penoz ta re neubeud!

YANN GOZ

Ia, rag eur maro kri

A c'hortoz ac'hanon-me, ha c'hoaz peb hini
Zo kalonek awalc'h evit klask tro war dro
Tud Loeiz ar C'houezekved evit mont d'ar maro.
Ar garante hepken evit ar bevien gez
A zigas ac'hanon war dresek Montroulez.

AR MAB

'Vit ar bevien!

YANN GOZ

Ia zur!

AR MAB

Lared d'in ta, Yann Goz,

Penoz ma ar bevien o troubli de ha noz
Ho kalon ken tener?

YANN GOZ

Bevet ar Republik!

Zilaou mad ta, potr kez, zilaou ta eun tammik:
Pa vo azeet mad ar Republik Kenta
Vo brao tre d'ar bevien, a vo brao tre beva,
Neuze deuz a glevan, hag an dra-ze zo zur,
Na vo taol a bed ken, na vo med plijadur
Gwennek e bed da rei d'an Iliz, d'an noblanz
Na vo med evurusted, e rouantelez Franz.

AR MAB

Penoz ta Yann Goz kez?

YANN GOZ

Na gomprennez ket c'hoaz

Penoz ar re binvidik vo divisket en noaz.

Traou an duchentiled vo roet d'ar bevien,
An dud rog-ze, d'ho zro, a vo hon mevelien.

AR MAB

C'houi zo léun a rezon Yann goz ar Melinez
Ia! peb hini d'e dro dle tanva ar vizer.

AN TAD

Ia, gwir eo an dra-ze!

YANN GOZ

C'han da veld ar Mestr braz
Benn eur pennadik aman chancho an tu d'ar vaz
Yann Goz na vo ket ken meliner er Poull-du
Mez mestr 'n eur c'hastell braz vo gwelet a bep tu
E c'hodellou vo leun a aour hag a arc'hant
E galon a vo seder, e spered a vo drant.
Kenavo ma zud mad!

AN TAD

Kenavo 'ta Yann Goz.

AR MAB

Benn eur pennad aman c'hi da veld Paolik koz.

Kevren VIII

AN TAD, AR MAB

Para zonjez ma mab deuz ar c'hoz sorser-ze
Zo treitour d'he vreudeur, d'e Vro ha d'e Zoue?

AR MAB

Gand eun tenn en he benn vefe re enored
Ar breur-ze da Judas na dal ket eur vouled,
He blas ve e sribill deuz eur gordenik vad
Tre an nenv an douar, e war blas ar marc'had.

AN TAD

Na dal ket ar gorden a iefe d'en krouga
E deuler barz ar ster a vefe ar berra
Rag me gav d'in ma mab, korfou an treitoured
Dlefent ket bea laket en douar biniget.

AR MAB

Ia ia! barz ar ster vraz d'ar pesked da zibri
E man plas Yann Judas hag e holl gendirvi.

AN TAD

N'eo ket se eo, ma mab, red vo d'emp partia
• War dresek hon breudeur vit dont da ziskleria
Ma miliner Poull-du o werza vit arc'hant
Soudarded ar Roue, hep remors na damant.
Pegoulz a c'hefomp kuit?

AR MAB

Benn arri ar soudarded

A vefomp pell ac'han etouez ar Chouanted
Evelse vo tapet Yann Goz ar miliner
Hag ive he deod lemm vel teod eur c'hemener.

DIVEZ AN EIL ARVEST

(Ar ridoch a ziskenn)

TRIDE ARVEST

Kevren I

HERVE SAZI, GUILLOU, JELVESTRIK

Neuze sonjez, Guillou, a teuo heb dale
Potred ar Republik en tu man d'ar Mene
Vit dond da ataki ac'hanomp, eur vech c'hoaz.
N'ouzez ket pegoulz, pe hirie pe varc'hoaz?

GUILLOU

Me zo zur a teufont benn eun nebeut deziou
D'argasi ar Breizad kuzet barz ar c'hoajou.
Red eo lared velkent zo eun trubard war dro!
E mesk ar Vretoned. Daoust a piou he gavo?
(Boum! boum! daou den fuzul.)

HERVE SAZI

Para eo an dra-ze? Kers da weld Jelvestrik.

GUILLOU

Ar re C'hilaz marteze.

HERVE SAZI

Na gav ket d'in Laouik.

Benn eur pennad aman Jelvestrik a teuo
Hag a lavaro d'emp pe sort zo barz ar vro
A ra kemend a drouz, kaji vel eur vouled
O vont deuz eur fuzul.

JELVESTRIK, berr warnan

Daou zen a zo bleset,
En tu-man d'ar mene int koueet leun a wad,
Unan zo iaouank tre, egile war an oad,
O daou int gwisket mad, evel ar Vretoned,
Med ho bleo a zo berr vel re ar C'hallaoued.

HERVE SAZI

Kemer eun den benak, Guillou, hag hast buan
Da gerc'had an dud-ze, pa eo gwir maint e poan
Pa veint en hon zouez vo goullet digante
Gand piou int bet tennet, ha piou a rer ané.

Kevren II

HERVE SAZI, JELVESTRIK

N'anveez ket an dud zo bleset evelse.
Pe int deuz bro Leon pe deuz koste Kerne ?

JELVESTRIK

Na n'ouzon sord a-bed, 'meuz goullet digant den
Hano an dud vleset, gouzout refomp zouden
Pa teufont da gozeal.

HERVE SAZI

Pa c'helfont kozeal,
Vo goullet digante ho hanoiou raktal,
Rag en amzeriou-man, eo red be prederius
En andret an holl dud.

JELVESTRIK

la red eo.

HERVE SAZI

Tra heuzuz !

JELVESTRIK

Para zo ta ma Mestr ?

HERVE SAZI

Netra, ma fotr bian,
Oan o sonjal hebken diwar an daou zen man.
Ma spered a labour, a ia bepret en dro
Evit klask gouzout piou eo an den divalo
Neuz tennet evelse.

JELVESTRIK

Marteze hon breudeur.

HERVE SAZI

O ! n'eo ket, me zo zur ! Deut vijent benn nemeur
Da zigas ar c'helou ha da laret dustu
Ar pez o dije gret. Memeuz deuz a bep tu
A vije bet deut tud ; rag gouzout a rez mad
Eo dalc'het an henchou gant kalz a botred vad ;
A ma n'int ket bet deut da zigas ar c'helou
An dra-ze a zeblant e maint en ho zoullou
O c'hedal ar re c'hlaaz hag an drubarderien
A teufe da glask noaz deuz ar soudardet gwenn.

JELVESTRIK

Piou eo an daou zen-ze a oa o tont aman
Ha para a glaskent ?

HERVE SAZI

Den c'hoaz na oar netra.

JELVESTRIK

Sell, erru eo Guillou ! Prestik a glefomp zur.

HERVE SAZI

Erru eo ar c'helou !

JELVESTRIK

la, war he blijadur.

Kevren III

HERVE SAZI

Penoz a ia an dud ?

GUILLOU

N'int ket vit kozeal.

HERVE SAZI

Gwell vleset int eta ?

GUILLOU

Ar gouli n'eo ket fall.

Benn eun neubeut deiou, marteze benn eun heur
A c'helfont kozeal 'vit konta ho gwalleur
A lared demp gand piou a int bet goullet
Ha 'vit para int deut treseg ar Chouanted

HERVE SAZI

Piou zo gant ar re glanv evit soagn ho gouli ?

GUILLOU

An Aotrou abad Loeiz a oar dre ar studi
Ar pez zo red d'ober evit ar gouliou,
Tre daouarn ar belek, en eun neubeut deiou
An dud-ze vo pare a prest da vont en hent
Pe da chom ganemp-ni.

JELVESTRIK

N'efont ket kuit velkent !

HERVE SAZI

Gweled a vo ma fotr, 'vit c'hoaz eo re abred
'Vit laret ia pe nan, p'eo guir na n'ouzomp ket
'Vit para int deut aman. Marteze hep dale
A c'helfont kozeal hag e klefomp neuze,
Pe int o deuz kelou da rei d'in, pe deuz ket,
Ha dre zorn piou ar foeltr ez int bet diskaret.

(Da hevil).

Leorlennadur

Pemp pez-teatr nevez

Breih, trajeriz en din loden, dre an Eutru M. Gouron,
person Gregam (e iez Gwened). **Priz : 1 real, franco, en ti**
Galles, mouller, ru an Ti-Kear, Gwened.

An drajedien-ma a zo deuz ar brava. E iez plean eo skrivet,
mez n'euz forz, diskuez a ra penn da benn pegen braz anaou-
degez en deuz an oberour deuz ar brezonek. Komz a ra ar pez
deuz ar Vretoned a ia kuit deuz o dro, ha deuz ar re a chom
er gear da labourat. Evel just, ar re a chom er gear a zeu ar
maout ganto e fin ar c'hoari. Plijadurus eo al leorik-ze da lenn,
ha talvoudus ive.

Arzur Breiz, pez c'hoari savet divar histor hon bro, gant
T. Ar Garrek, hucher en Plouigno (Treger). **Priz : 4 real,**
franko en Leordi Moris an Dault, 6, ru ar Val-de-Grâce,
Paris, V.

Houma zo eun drajedien euz ar re gaëra. Ar gwella testeni
a ze, eo ma 'z eo bet roet ar priz kenta d'ezi en Kendalc'h Gou-
rin er bloavez 1904. Konta ra d'eomp var he hed, en eur bre-
zonek dispar, gant rimmou garanet en houarn, histor truezuz
Arzur Breiz, bet d'ezan eur maro ken trist. Al leor-ma a zo da
veza lennet ha gwelloc'h zo, da veza c'hoariet er muia lec'hioù
a vezo gallet.

Alanik al Louarn, pez-c'hoari plijadurus en 2 arrest, gant
Ian-Mari Perrot, kure Sant-Vouga (Leon). **Priz : 4 real.**

Ar pez fentus-ma eo eal ar maout gantan e Kastell Kerian,
e-lec'h m'eo bet displeget meur a wech dirag millierou tud.
Hennelekaet eo divar ar gallek : l'*Arcoat Pathelin*. En divez
euz al leor, e kaver eun orzenad kanaouennoù kaër, gant ar
muzik notet euz an ton.

Job al Lounker, troet e brezonek Leon dicar brezonek
Gwened, gant an abad Perrot. *En hevelep leor, eur pezik*
berr, euz d'ar cezenti ive : Dre ar Bugel.

An daou bez asamblez, evit 4 real. Skriva d'an Ao. Abad
Perrot, en Saint-Vougay, dre Witevede (Léon).

Fontanella, pez c'hoari tennet euz a histor Kerne en am-
zer al "Ligue", gant Fauch ar Goyen, deuz Ponte-Kroaz.
Priz, 4 real.

Ar pez-ma a zo bet displeget en Ponte-Kroaz, hag ive
gant Paotred ar C'hap, a zonjan Eur gwir drajedien eo penn-
da-benn, hag al lenner a dremenn heb eil tro dre beb sort
santimanchou ar spered en eur weled krizder hag ive kalon-
der an torfedour braz Guy Eder, leshanvel Fontanella.

Evelse e welit pebez araokat souezus en deuz great Teatr
Broadus Breiz en eur maread eur bloaz ! Eun dudi eo ! Dal-
c'homp var an hent-ze hep feaza.

Trugarez ive a lavaromp en hano Strolladou Paotred ar
Pejou brezonek da *Gevedigez Vreiz*, pehini, e Kendalc'h Kas-
tell, he deuz gopreet dre heb a vedalen arc'hant Renerien ar
Strolladou krouet en 1905.

Paëroniez "AR VRO"

An Aotrou 'N Eskop DUBOURG. — An Aotrou Markiz ha Kannad AN ESTOURBEILLON. — An Aotrou Kannad LAMY. — An Aotrou Kannad HEMON. — An Aotrou Markiz FREDERIK A GÉROUARTZ. — An Aotrou Drouiz IAN AR FUSTEK, "AB GWILLERM" — An Itron Enorus MOSHER. — An Itron Enorus ANNA A GERVENOÆEL.

HANOIOU SKRIVANIERIEN "AR VRO"

Iez Gwened. — Blei Lannvau. — Bleimor. — Kelen Glaz. — Eflam Koet-Skau. — Job en Drouz-Vor. — Loiz Herriou (Barh labourer). — Pengleuik.

Iez K. L. T. — Jos Albaret. — An Arc'hantek. — Armel. — Ar Berr (Abalor). — Bruk. — Ar Bruger. — Charlez Ar Braz. — Barz ar Blawez. — (ar Yeodet) Bocher. — Biler (Azenor). — Berthou (Alc'houeder). — Barzik Kerglaz. — Ar C'hozik. — Ar C'horfek. — Ar C'harget. — An Du. — Evnik Arvor. — Esnault. — Even. — Ian Ar Fustek. — Ar Furcher. — Ar Garrek. — Ar Goffik. — Ar Gall. — — Ar Gak. — Godest. — Gwennou. — H. Gwillerm. — Gouriou. — Eflam An Henoret. — Jaffrennou (Taldir). — Kerniliz. — Lunedek. — Meriadek. — Ar May. — L. Ar Menn. — Orain. — Pennhouarn. — Ch. Picquenard (Barz Melen). — F. R. Plouescat. — Loiz Porzikel. — Potr Ar C'hap. — Klaoda Ar Prat. — Per Pronost (Barz Treflez). — J. Ar Pelleter. — Renan Ar Rouz. — Jord Ar Rumeur (Mathaliz). — Ian Roudot (Mel-oc'h-dir). — Erwan Sebillot. — Ar Sevellek. — Tiercelin.

MOULLEREZ AR GWAZIOU HA JAFFRENNOU E KERAËZ (Penn ar Bed)

*Les Imprimeurs
Le Guazion - Jaffrennou*

Le Gérant: Etienne JACQ.